

8N3-2-019

KANTIKOU

EVIT

GOUELIOU NEDELEK

— gant eur Missioner breizad —



J.-M. GUIVARCH, Leorier
Ru Kereon, KEMPER



Kemper, Moullerez ru an Dudchentil.

TAOLEN

	Pajen.		Pajen.
1. Deut, va Zalver, va Doue.	3	7. Da gaerik Bethleem	11
2. Ni hoc'h ador.....	5	8. Meuleudi.....	12
3. E Bethleem eo ganet.....	6	9. Var ar menez.....	13
4. Deomp holl, kristenien...	7	10. Messaer, Messaer.....	14
5. Gant an holl Elez euzuz...	7	11. Mabik Jezuz.....	15
6. Hanter noz eo l.....	10		

Ton ar pevare kantik, p. 7 (1).



Deomp holl, kris-te-nien, da ve-let Ar bu-ge-




lik ne-vez ga-net; Guir Vab eo d'an Tad e-ter-




nel. Deomp d'hen a-do-ri 'n he ga-vel.

E meur a leac'h, fin an ton a vez kanet evelhen :



Hag e leac'h all, en doare-ma :



Deomp d'hen a-do-ri 'n he ga-vel.

(1) E eskopti Sant-Briek ez euz eun ton eun tammik dishenvel.
Merket eo var-leor kantioù an Aotrou Guiterel, n° 107, .157.

KANTIKOU

EVIT

GOUELIOU NEDELEK

KENTA KANTIK

Var don; Venez, divin Messie (Toniou n° 72).

DISKAN :

*Deut, va Zalver, va Doue,
Da gass peb drouk pell diouzomp;
O guir zoursen a vue,
Deut buhan davedomp.*

Ah ! diskennit; hastit affo; (1)

Ni c'hortoz abaoe pell zo;
Hon diouallit dioc'h ar maro.

Deut, va Zalver, va Doue.
Da gass peb drouk pell diouzomp;
O guir zoursen a vue,
Deut buhan davedomp.

Na zalc'hit ket a zrouk pelloc'h;
Ni gouez d'an daoulin dirazoc'h;
Ni harp hon holl fizians varnoc'h.

(1) Affo : buhan.

An ifern gant he gounnar
A zeu goassoc'h da stourm ouzomp.
Diskennit var an douar,
Deut buhan davedomp.

Hon huanad ra vo klevet :
Ar madou kaer hon euz kollet
Daoust ha ne vezint mui kavet ?
Stank e tired hon daelou ;
Va Doue, ma pardounit deomp,
E vo fin d'hon ankeniou :
Deut buhan davedomp.

Eur vech ma vefot diskennet,
Ni velo an ifern klozet,
Hag ar baradoz digoret.
Ni c'hortoz hed an amzer ;
An Ee ho peuz graet evidomp ;
D'ho ker e rankit delc'her :
Deut buhan davedomp.

Grit ma c'hellimp holl assamblez
Kana eun deiz, en ho palez,
Hag ho kloar hag ho karantez.
Setu ar guir eursted
Zo a-viskoaz preparet deomp.
Eun errez deomp e rofet,
En eur zont davedomp.

J. B.

EIL KANTIK (1)

Var don : *Peger kaer ez eo Mamm Jezuz.*

DISKAN :

*Ni hoc'h ador, Mabik Jezuz,
Mabik dous ha karantezuz,
Doue meurbêd madelezuz.*

Mabik Jezuz, e kreiz an noz,
C'houi a zilez ar baradoz,
'Vit dont en hon touez henoz.

Mabik Jezuz, Doue-Bugel,
Ra vezo klouar an avel
En noz-man, en dro d'ho kavel.

Mabik Jezuz, dre an envou
Elêd a gan deoc'h kantikou...
Perag 'glevan-me ho klemmou ?

Mabik Jezuz, me oar ervad
Perag e vouel ho taoulagad ?
Hor pec'hed 'ra deoc'h kalonad !

Mabik Jezuz, evit bepred
O me a dro kein d'ar pec'hed.
Va c'halon deoc'h zo gounezet.

Mabik Jezuz, hed va buez,
Me a veulo ho madelez ;
Ra varvin en ho karantez !

(1) Tennet divar *Feiz ha Breiz* koz, 23 a viz Kerzu 1876.

TREDE KANTIK (1)

Evit an ton : Cf. *Varte preces Solesmes*, p. 72.

E Bethleem eo ganet, alleluia,
Jezuz hor Zalver beniguet, alleluia, alleluia.

DISKAN :

*Gant laouenidigez
Meulomp oll Jezuz hor Zalver
En eur c'hantik nevez.*

Guir Vab Doue en em c'hreat den, alleluia,
A zo kousket etre daou loen, alleluia, alleluia.

Souezi rafac'h a dra zur, alleluia,
O velet Doue krouadur, alleluia, alleluia.

He-unan e c'hounarn ar bed, alleluia,
Ha gant he vamm e vez douget, alleluia, alleluia.

Dont a ra 'n Elez euz an Ee, alleluia,
Da velet er c'hraou Mab Doue, alleluia, alleluia.

Oll en eur c'hantik dudiuz, alleluia,
E ventont a-unan Jezuz, alleluia, alleluia.

Gervel a reont ar Bastored, alleluia,
Da velet ho Zalver ganet, alleluia, alleluia.

Deuz Saba e teu tri Roue, alleluia,
Da stoui dirag ho Doue, alleluia, alleluia.

(1) *Feiz ha Breiz*, Nov.Déc. 1902.

Da Jezuz evidomp ken paour, alleluia,
E roont ezanz, myr hag aour, alleluia, alleluia.

Evit diskuez dre gement-ze, alleluia,
Eo guir Doue, den ha roue, alleluia, alleluia.

Mab Doue zo e guirionez, alleluia,
Mab da Vari atao guerc'hez, alleluia, alleluia.

'Vit hor prena ni pec'herien, alleluia,
Eo he-unan en em c'hreat den, alleluia, alleluia.

Oll eta, er gouël kaer-ma, alleluia,
Meulomp Doue heb ehanâ, alleluia, alleluia,

Gloar da dri Ferson an Dreinded, alleluia,
Beteg ha goude fin ar bed, alleluia, alleluia.

PEVARE KANTIK

Var don : *Jesu Redemptor*. (Huelloc'h, p. 2.)
pe : *Jesu, dulcis memoria*.

DISKAN :

*Deomp holl, kristenien, da velét
Ar bugelik nevez-ganet ;
Guir Vab eo d'an Tad eternal,
Deomp d'hen adori 'n he gavel.*

O pebez kelou a joa !
E Bethleem 'kreiz an noz-ma,
E Bethleem eo bet ganet
Jezuz hor Zalver beniguet.

Eno, gant ar Verc'hez Vari,
 Eo bet ganet evidomp-ni.
 Nag hen zo koant ha grasiuz !
 Nag hen zo humbl ha gouzanvuz !

He gorf tener zo mailluret ;
 'N eur manjouer eo gourvezet ;
 Gourvezet var eun dornad foen,
 'Tre eun azen hag eun ejen.

Diskennet eo leun a druez,
 Da zigas deomp ar guir vuez.
 Lakomp da dalvout he c'hrassou
 Prenet dre gement a boaniou.

Kanomp Nouel da Vab Doue
 Henoz diskennet euz an Ee.
 Holl, a-unan gant an Elez,
 Meulomp, meulomp he vadelez.

A benn poent ar gommunion,
 Guerc'hez, preparit va c'halon.
 Pa 'z in da resep ho Mabik,
 Roit d'in ho kalon birvidik.

Araok ma teuot davedoun,
 Mabik Jezuz, lakit ennoun
 Purete an Elez santel,
 Zo en dro deoc'h stouet izel.

Ennoun c'hoaz lakit, o Jezuz,
 Eur guir fizianz, eur feiz nerzuz :
 Roit d'in fizianz ar Bastored
 Ha feiz nerzuz ar Rouaned.

J. B.

PEMPED KANTIK

Ton : *Kasset e voue gant Doue* (Toniou n° 73).

DISKAN :

*Gant an holl Elez euz
 Unanomp hor moueziou ;
 Kanomp d'ar Mabik Jezuz
 Hor c'haera kantikou.
 Myster he C'hinivelez
 Da Zoue a ro gloar,
 Ha digas a ra ivez
 Ar peoc'h var an donar.*

O burzud a garantez
 Mab Doue he unan
 Evit hor zilvidigez
 Zo deot paour kez bihan.
 Red eo e ve hon ene
 Eunn dra a briz huel,
 P'e guir 'vidomp eun Doue
 A zisken ken izel.

'N eur zizenti ouz Doue,
 Hon tad kenta, siouaz !
 Hen doa var he vugale
 Tennet malheuriou braz.
 Jezuz 'n he C'hinivelez
 A velomp er c'hontrol
 Dre nerz he zentidigez
 Oc'h ober vad d'an holl.

Dre garet re ar madou,
 An dud oa 'n em gollet.
 Re stag oa ho c'halonou
 Ouz an holl draou krouet.
 Jezuz 'n he C'hinivelez,
 Da rei deomp eur gentel,
 'Kreiz ar vrassa paourentez
 A fell dezhan genel.

Azalek ma-z-oc'h ganet,
 Perag ive, Jezuz,
 Perak ho peuz-hu choazet
 Eur vuez ker poaniuz ?
 Evit rei deomp da gompren
 Ne c'hell hon eneou
 Nemet dre ar binijen
 Tizout bro an envou.

Jezuz, me vel an daelou
 Var ho pizaj tener.
 Siouaz ! dre va fec'hejou
 Ounn bet kriz 'n ho kenver.
 Sec'hit, mabik beniget,
 Sec'hit ho taoulagad,
 Rag, a-vreman, d'ar pec'hed
 Me dro kein evit mad.

J. B.

CHUECHVED KANTIK (1)

Var don : *Kavet emeuz ar peoc'h.*

Hanter noz eo! Deut eo ar momet santel
An Den-Doue a zisken davedomp.
Lemel a rai ar pec'hed orijinel:
Kounnar he Dad oa troët divarnomp.

DISKAN :

*Gloar d'Hor Zalver! En noz-ma ken burzuduz,
Ra vo dre holl meulet he drugarez!
Var hon daoulin, kanomp gant eur vouez herzuz:
Nouel ! Nouel da Vabik ar Verc'hez ! (bis)*

Ra zeni, ennomp, ar feiz gant he sklerijen
Da ziskouez deomp kavel an Den-Doue,
Egiz ma oue guchall, gant eur stereden,
Beteg ennhan kasset an tri Roue.

Tud gallouduz, dorc'h ennoc'h gant ho madou,
Roue ar bed en eur c'hraou zo ganet!
Tostait outhan da glevet he genteliou,
Hag e reot fae var an holl draou krouet.

(1) Great a-nevez var batrom ar c'hantik : *Minuit ! chrétiens.* An ton gallek, ker brao gant komzou gallek, ne ia ket koulz e brezonek. Choazet zo bet eta kentoc'h eun ton all anavezet ha karet gant an holl. Ma vez c'hoant koulzkoude, e vezo gellet miret an ton gallek, gant ma vezo great pozioù, koubiadoù eiz linen.

Gant Hor Zalver hor chadennoù zo torret ;
Breman omp libr ; digor eo deomp an Ee.
Elcac'h beza sklavourien d'an drouk-spered,
Breman ez omp bugale-da Zoue.

Poaniomp, poaniomp da ziskouez d'ar Bugelik
Hor c'harantez, hon anaoudegez vad.
Lavaromp holl stouët dirag he graouik:
Kentoc'h mervel eget dont d'ho kuitât!

J. B.

SEIZVED KANTIK

An « Adeste fideles ».

Var an ton latin.

Da gerik Bethleem diredit, kristenien ;
Diredit heb dale ; sellit laouen
Roue an Elez
Ganet gant ar Verc'hez.

DISKAN :

*.Deuit holl, deuit d'hen adori (bis),
Ha da ginnig dezhan mil meuleudi.*

Setu ar bastored o kuitât ho derved ;
Gant Elez davethan int bet galvet.

Davethan ivez
Redomp gant devenez. *Diskan.*

Deomp eta : ni velo Mab an Tad eternel ;
Kemeret 'neuz 'vidomp furm eur bugel.

En he' vailluriou
E velimp hon Aotrou. *Diskan.*

P'e guir eo evidomp ganet er baourentez,
Holl dezhan diskouezomp hor c'harantez.
D'hor guella mignoun
'Rankomp rei hor c'haloun.

J. B.

EIZVED KANTIK

Meuleudi.

Var don : *Meulomp oll.*

Kanomp holl meuleudi } *bis*
Da Jezuz ha da Vari.

1. Mab Doue, euz an envou,
Dre he c'hiniwelez,
A zigas levez
Ha peoc'h d'an holl galonou.
2. Guelet a reomp 'n he gichen
Jozeph hag ar Verc'hez ;
Guelet 'reomp an Elez
En dro dezhan a vanden.
3. Ar Bastored 'zeu prestik
D'ar c'hraou d'hen adori,
Ha d'ezho, gant dudl,
Mari 'ziskouez he Mabik.
4. Kinnig a reont da Jezuz
Ho frezanchou dister ;
Jezuz ho digemer
Gant eur mousc'hoarz dudluz.

5. Gant an Elez beniget,
Gant Jozeph ha Mari,
Kanomp mil meuleudi
D'hor Zalver nevez-ganet.

6. Heb dale, an tri Roue,
Diredet a bell bro,
A zeu ive d'ho zro,
Da glask ar Bugel-Doue.

7. An tri Roue a ginnig,
Gant feiz ha gant doujanz
Aour ha myr hag ezanz
Da henori ar Mabik.

8. Kinnigomp d'he vadelez
Gant ezanz hor peden,
Myr eur guir binijen,
Dreist holl : aour ar garantez.

J. B.

NAVED KANTIK

Var ar memez.

Ton : *O Vierge, fontaine, rocher.* (Kantik Lourd.)

- * Var ar menez ar Bastored
A greiz diouall ho denvedigou,
Souden en noz sklerijennet
Ho deuz klevet e bar an envou :

Nouel, Nouel, Nouel, da Jezuz. (bis)

- * Aberz Doue eur burzud braz
Var an douar a zo c'hoarvezet ;
Hag an Elez a respontaz :
Eur Zalver evidoc'h zo ganet.

- * Hag ar Bastored etrezho
An eil d'egile a lavare :
Kerzomp, brema ni a velo
Hor Zalver, hor Mestr hag hor Roue.

- Selaouit oll, eme an El,
It da Vethleem, da gear David ;
Eno e kafot eur bugel
D'ezhan a greiz kalon lavarit :

- * En eur c'hraou digor d'an amzer,
Ha var eun tamik plouz astennet
Eno e veljont ar Zalver,
Ar bugelik nevez mailluret.

Evel ar Bastored, sentuz
D'an Elez ho deuz ho c'helennet,
Ni hoc'h ador, Mabik Jezuz,
Epad an nozvez-ma benniget.

Evel guechall holz an envou,
An Iliz a zo sklerijennet ;
Kinigomp oll hor c'halonou
D'hor Mabik Jezuz muia karet.

Mabik Jezuz, o diskennit
Brema var an douar diskennet,
Er Zakramant euz an Aoter
Ra viot da viken adoret.

* Mabik, Jezuz, o diskennit
Dre nerz ho Sakramant adoret ;
Diskennit ennomp, ha mirit
Na vezimp taget gant ar pec'hed.

Pa deui evidomp ar maro,
Hon digemerit gant karantez,
Ha da virviken ni gano
En ho Paradoz gant an Elez.

H. DU R.

DEKVED KANTIK

Messaer, Messaer.

Var don : *Berger, berger.*

Messaer, Messaer, livirit, ne velit-hu ket ? (*bis*)
En eur velet ar c'hraouik dister,
Va c'halon baour a lamm em c'hreiz. } *bis.*

Ia, setu aze ar c'hraou dister
A guz eun Doue en he greiz.
Sonj ho peuz deuz komzou an Elez ?
Hag hi oa kaer ha dudiuz !
Int a gane : e bar ar Envou gloar,
Gloar da Zoue mestr holl c'halloudus.

Messaer, Messaer, ia e Bethleem omp digouezet ; (*bis*)
Deomp buhan da velet ar Zalver } *bis.*
A ro Doue d'he bobl direiz.
Ia, setu aze ar c'hraou dister
A guz eun Doue en he greiz.
Strafullet oll oan var ar menez,
Pa veliz ho dremmou skeduz ;
Int a gane : ar peoc'h var an douar
D'an holl dud eun a galoun ha sentuz. (*bis*)

B. C.

UNNEKVED KANTIK

Mabik Jezuz.

Ton : *O Vierge, fontaine, rocher.* (Kantik Lourd.)

DISKAN :

*Mabik Jezuz, ô va c'harantez,
Renit, renit em c'halon bemdez !*

'Tal ho kavel, Mabik Jezuz,
Na dous eo kana gant an Elez :
Gloar en Ee d'an Oll-C'hallouduz,
Ha d'an dud vad peoc'h ha levezet !
Peoc'h ha levezet am bezo
Keit ma renfet, Jezuz, em c'halon :
E va ene keit ma pado
Ar garantez 'peuz bet evidon.

'N hor c'halonou dridomp gant joa !
Kenavo deoc'h, glac'har hag anken !
Peurc'hraet eo ar burzud hrassa :
Unanet eo Doue gant an den.
An ifern a iud gant kounnar,
An douar a zrid gant levezet,
O klevet ar c'helou dispar
Kasset euz an Ee gant an Elez :

Ganet eo deoc'h, e' kear David,
Ar Zalver a c'hortozit keit-so ;
Mab Doue eo, hen adorit !
Baradoz zo da neb her c'haro.

En eur c'hraouik 'tenez al loened,
Gant lienach paour 'vit maillurou,
Var eun dornadik plouz kousket,
C'houi gavo Mab Doue hon Aotrou.

Kuitet hen deuz bar an Envou
Evit savetei ar bec'herien.
'N em westlet eo d'an oll boaniou
Evit prena eurusted d'an den.

'Dalek kavel kraouik Belhleem
Betek kroaz kalet menez Kalvar,
Jezuz c'houzanvo eb 'n em glem
'Vit ar bec'herien peaniou dispar.

'Vo ket peadra kement-ze
'Vit diskuez d'an dud he garantez ;
Korf, goad, ene, divinite
'N em rei d'ezho da vageruez !

Var ho aoteriou, deiz ha noz,
Kuzet dindan ar spes a vara
'Jommo hepred ouz ho gortoz ;
Genel 'n ho c'halon vo he oll joa !

Evit eur garantez ker braz
Penez diskuez hon anaoudegez ?
En Ee, Jezuz, ho karimp c'hoaz ;
Anez ve ber kant mil bloaz buez.

Da ginnig d'eoc'h 'vel donezon,
N'or beuz aour, ezanz na myr ive.
N'hellomp kinnig 'met hor c'halon ;
He digemerit, o va Doue !

Siouaz ! hor c'halonik zo paour,
'Vel kraouik Belhleem diranvet ;
Mez holontez vad a dalv aour
Da neb a fell dezhan ho karet.

Plijet ganeoc'h, Mabik Jezuz,
Ober eun aoter deuz hor c'halon ;
Tost deoc'h hebken ez omp euruz,
'Vel n'oa biskoaz roue var he drou.

Rag neuze 'kreiz hon oll boaniou,
Ni gan 'velato gant levenez ;
Na dous eo karet hon Aotrou,
Evel m'her c'har en Ee an Elez !

Ia sur, deoc'hui, Mabik Jezuz,
Ni fell deomp oll beza da viken !
Kenavo 'ta did, bed trompluz !
Da Jezuz omp, da Jezuz hebken.

Da Jezuz omp braz ha bihan.
He c'houre'hemennou dous ha san-
A'heuilimp hepred er bed-man ! tel
Hag hor bo baradoz eternal.

Eno e tal ho tron, Jezuz,
'Kanimp da viken gant an Elez ;
Gloar, enor d'an Oll-C'hallouduz,
Ha d'an dud vad peoc'h ha levenez !

H. L.

Imprimatur :

Corisopiti, die 14 Novembri 1908.

A. COGNEAU, Vic. gén.

